





RIMOU
HA
GOULENNOU
EVIT AN EUREUJOU.



E MONTROULEZ,
Et ti LÉDAN, Imprimer, e traon Ru ar Vur.



R I M O U ,
DISCOURSIOU HA GOULENNOU ,
EVIT AN EUREUJOU .

Discours pa zér da bedi d'un Eured.

SALUD deoc'h oll , Compagninez :
Dre ar zalud emeus commancet va dévez.
Me a so deut da doull ho tor
Gant calz eus a henor :
Antreet joaus en ho ti
Gant ur c'hoant vrás d'ho saludi ,
Da Zoue ar zalud humblamant.
Goude me ray va C'homplimant.
Piou eus an ti-màn a bedin-me da guenta ?
Pedi a ràn ar Mestrou ha qement so ennàn :
Mar deus domestiqtet en ho ti ,
E no fedàn ive coulz ha c'houi :
Rac re a labour am be
O pedi an eil goude eguile
Da zonet hep faut da ur Banquet
A vezò evidomp preparat
Gant Mari Lipiq ha Yan Baron ,
Pere ho ped ganeomp-ni a greis calon.
Fixet eo an devez da Zemeurs qenta ;
Rac-se , mar plij ganeoc'h , deut oll da asista ,
En bourg Plouyan e vezò an Eured.
Hac en ti Flampes e vo ar Banquet
Mar plij ganeoc'h en em gafet ,
Hac e vezimp contant meurbet.
Me ya da gonta deoc'h ar veach :

Dont a refot da.... da guemeret ar plac'h ;
 Ac'hane e vezò cunduet d'an Ilis ,
 Betec an Auter, evel ma zeo requis ,
 Evit ober ur memes contrat
 Evel m'eure goechal he mama eus be zad.
 Eno neuze e vezint eureujet
 En presanc Doue hac ar Beleg ,
 Hac an oll asistantet ,
 Gant solanite ha respect ,
 Hac hor Mam Zantel an Ilis .
 Cozeomp bremàn gant honestis :
 Me eo an hini a so choaset
 Da bedi evit ar Plac'h a Eured ,
 D'he fedi ha d'he enori ,
 D'he asista da eureuji .
 N'ouzon qet sur a gomplimant ,
 N'on qet custum da barlant :
 Mes yaouanq on , hac e tisqin :
 Mar plij ganeoc'h va excutin.

*Anan e peder ar Bederien da antreal en ti ,
 ha da zével ous tol.*

AR PLAC'H YAOUANQ.

Silanc éta , Compagnunes ,
 Ma parlantin evit ar Plac'h a Zevez .
 Dre ma savàn ebars em za ,
 Excus diganeoc'h a c'houlennan .
Mari Lipiq e deus va sedet
 Da eva ur hanne d'he yec'hed .
 Peb action gaer pa er grân ,
 Dre Sin ar Groas er gommancan :
En Hano an Tad , ar Mab , ar Speret Gloan ,
 Tri Ferson distinct en unan :
 Da Zoue ar zalud da guenta ,
 An eil d'an Itron Varia ,

An drede d'ar Zent ha d'an Èle,
 Déc'h, Compagnuez honorabl, e presant àn'r bêvarej
 Evit ar boan oc'h eus bet,
 E zàn da rîe deoc'h peb a voget,
 Pini a meus destumet et Jardin a Eden ;
 En ur c'hared fleur, pa voan enni ho pourmen ;
 Da guenta d'ar Vêleyen e roàn an bec'herien ;
 Dre ma zint o Fastoret hac ho Gouarnierien ;
 Goude d'an Dud-Jentil ha d'an Noblanc ,
 Pa em eus an honor da barlant en o fresanç ;
 E roàn ar gurunen spern
 A zougas Mab Doue p'or prehas eus an isern ;
 Evit ma teuyo da biqat hon ene ,
 Evit ma vint curius da zouten ar Fe ;
 Deoc'h-u , tud demezet , ezac'h lia graguez ;
 E roàn ar vezen a vuez ,
 Rac en e deillou me meus bet remerget
 Ar c'homzou precius eus ar baciantet ;
 Ha c'houi , goaset yaouanq , m'o ped da imita
 An autrou S. Joseph , pa voa var ar bed-mâ ,
 Pehini a gunduas epad e oll vute
 Purete , chastete , temperanç , carante .
 Ha nî , merc'het yaouanq , laqomp hor fantast
 Da henori ar Verc'hes , pini a hanver Mari ;
 Initomp he ferveur ; beza e zeo ive
 Rouanez an douar hac an èe .

Me garje beza gallet niont betec Paris ;
 Evit disqi deoc'h eus a bep seurt honestis .
 Me so en em vellet hirio a un dra ,
 Ha n'en don na gouyapl na capabl anezâ ;
 Rac me so ur plac'h yaouanq ignorant ,
 Hac emeus nebeut a sqiant :
 M'am bije me bet un tam discamant ,
 M'em bije teod aoüalc'h evit parlant .
 Mari Lipiq , mignonet , hirio sur a laval

N'eus niçun er gompagnuez n'e c'har :
 Mes âl re he honor o tont d'he asistu,
 Eus ar re-se sur he deus ar maya joa :
 Hac un all c'hoas a zivizan,
 Ennes sur a gar ar mayau,
 Hac & stô dezi ordenez da garet
 Muyoch' eti amizer da zont eguet en hini tremenet.
 Cetu aman e han : *Yan Barón* e zeo hanvet.

Arça eta, compagnuez honoral, me ho ped,
 Pa zomp aman oll en em assamblet,
 Un tol chanch bras e ve en em gasemp jamez
 Hep manqout hini ebet assambles :
 Ne meus na pouvoar na gallout
 Da eva ur banne da yec'het pepini ac'hanoc'h tout.
 Mes brenan e zan da eva ur bannez
 D'ho yec'het oll, Compagnuez.

Eva a ra ur banne da yec'het an Den Yuouang.

Meu ya bremâ da eva ur banne
 Da yec'het an Den-Yaouang iye :
 Hac evit ma vez ganeoc'h hanavezet,
Charlezic Mistiflor e zeo partout hanvet.
 Deoc'huita, *Mistiflor*, bremâ e regetan
 A bep seurt madow er bed-mân,
 Hac oc'h oll souet var ar bed,
 Mar deo gant Doue destinet.
 Ma vijen bet tenzorieres assuréz.
 Var an oll denzorhou eus ar bed,
 Eus a netra ne vijach' bet refusot ;
 Mes Doue en deus hor gonarnet
 Evit beza er bed-mâ meulez :
 Evomp ur banne pophît d'ho yec'het.

7

*Discours evit goulen ur Blac'h nevez da elercyl ;
gant ar respont conform evit he réy.*

Goulen. Bonjour deoc'h , Compagniez ,
Salud gant laouenidiguez ;
P'o quelan azé assamblet ,
Dibreder ha biao guisqet ,
E credan oc'h eus amzcr
Da zelaou daou pe dri guez
Ni a so tremehidi ,
Carguet eus a guevridi
Lavarit deomp eta bremàn ,
Peseurt hano he deus ar guær-màn .

Respong. Ni a rent ar memes salud
Deoc'h oc'h-unan ha d'ho tud .
Sansibl qmp d'ho complimanchou ,
Ha d'oc'h oll reverancoù ,
Hac hon eus calz a interest
Da zuppozi oc'h tud honest ;
Mes mar deo tremen a fel deoc'h ,
N'on eus affer ebet ganéoc'h .

G. Ous ho clévet o parlant ,
Me gred oc'h eus calz talant ;
Hac e velan iye ractal
E moc'h sur en gout da farçal ,
Pa na respontit qct
D'ar pez am eus gouleñnet ;
Mes ni a sô deut eus a bel ,
Ha mar chomomp discabel ,
Ec'h alfemp goude c'hoëzi ,
Attrap un tam pleurezi ,
Rac-se permetit souden
E ve goløet hor penn ,
Mar cavit e zeo diecon ,

Lavarit deomp ar feson.

*H. A viscoas em eus clêvet
Eo fall penn lout avelet ;
Mac'h attrappt calz pleurezi ,
N'en em glêmit qet ouzomp-ni :
Bez oc'h eus peb liberte ,
Grit dious ho comodite ,
Ha pa vezot toget tout ,
It pa garfot en ho rout.
Ni n'en daump qet d'ho pressi ,
Evit ho laqat da c'hoezi.*

*G. Penos eta , va mignon ,
Me ho cave den a fêcon ,
Hac e laqen em speret .
E vijen ganeoc'h pedet
Ebars eu ti da antren ,
Da laqat tan var va sben .
Neuze souden en ur fumi ,
Me lavarje va c'herevedi ,
Hac erfin va c'homplimant
M'ar bije d'ho santimant ,
Ho pije ar civilite
Da offr un tam hac ur banne .
Ma vijec'h qen aviset
Ho pije sur gonezet ,
Rac me a dleye ho petti
Da zont ganeopp da zijuni ,
Ha goude-se da leina ,
Hac er fin da goania ;
Mes pa na rit deomp qen henor
Nemet dioüal toull bo tor ,
Chom ger fier en hoc'h ès ,
Evit hon delc'her ni ermès ,
N'en doc'h-u qet un heritiq ,
Pe mab da ur fals pinvidic ?*

R. Selaouit, va c'hamarad,
 En em entent a ve mad.
 Ni hon eus guelet avichoué
 Certen tud a vandenoué
 Oc'h antren hardimant amâ,
 Hac ho tonet da ziframma
 Qig, anduill, lin ha qigsall,
 Crampoez, ha calz eus a draou-all;
 Hac eo ret mad deomp goude-se,
 Derc'hel hon ti en surete.
 Allas ! ne ouzomp doare
 Ha c'houi a ve eus ar seurt tud-se
 Goucoude mar d'oc'h squis en ho s.
 Ha c'hoant deoe'h da azeza,
 Me roy deoc'h ur voutes prenn,
 Azeit unan'e pep penn ;
 Neuze hac e vec'h ermès,
 E parlanfot en hoc'h ès.

G. Mar deo disfianç ho laqa
 D'hon trèti er fécon-mâ,
 E tiscléryàn a boues pen
 N'omp qet ar seurt friponerien
 Laeron anduill ha qigsall,
 Na troiadellerien fall,
 Més hon eus commission
 Conform d'hon Relijion ;
 Rac merget eo er Scritur,
 Penos guechal un den fur,
 Hanvet voa Eliezer,
 A ras ar memes micher,
 Ha penos, herves an histor,
 E voe tretet gant henor.

R. An histor-se, va mignon,
 A verit attantion.
 Un talant ar c'haera.

Eo gouzout en ein explica.
Hac erfin ho complimant,
Mar bezit d'hor santimant,
Ni a velo petra da ober,
Petra a ras Eliezer ;
Pe mar qerit da guenta ,
Livirit petra voe grêt dezâ.

G. Eliezer , va c'hès ,
Ne voe get lezet ermès :
Deputet yoe gant e vestr ,
Evit pini en doa interest ,
Da glasq ur plac'h destinet
Gant Doue evit pried
Da Isaac den yaouang flam ,
Ha mab unic da Abraham .
Evelse , dre urz an tad ,
E partias mintin mad ,
Hac ec'h antreprenas joaus
Ur veach hir ha fatigus ,
Var zu Mesopotami ,
Heb gouzout hent ebet dy .
Mes pa ignorer an hentchou ,
E zêr mad var goulennou .
Evelse éruet amân ,
E c'houlennâñ hano an tin-mân .

R. Ho ! ma vije deut hennes amân ,
Ni hor bije poqet dezân ;
An den-se , a lavarit ,
A voa un den a verit ;
Mes bremân eus un amzer all ,
Hac e vale calz tud' fall :
Bremân e . veler bizier-balân ,
Prest da grevi gant bêr alan ,
Oc'h invanti niver traou ,
O clasq laqat guir ar gaou ;

Uza reont tout o adres ;
 O prometi mor ha meneš ;
 Un den a lávar calz a draou ,
 Ne zint peurvuya nemet gaou ;
 Mar doc'h ur gascon evelse ,
 Troit ho qein pe it adre.

G. An hini a so va model ,
 A voa guirion ha fidel ,
 Clévit c'hoas daou pe dri guer
 Var gampagn Eliézer .
 O veza pedet Douc
 D'e gundai en demarch-se ,
 Ec'h éruas directamant
 Elec'h ma ma edo ar plac'h yaouanq .
 Caet evel ur stereden , en ur famill an hñesta ,
 Tud ar re charitapla ;
 Pedet voe da vont en ti ,
 Quiniguet dezàn da zébri ,
 Mes én lavaras a gress
 Ne guemerje brienc
 Nemet goude expliq'a
 An urzou roet deza .
 Ahàñ ive , va breur'ger ,
 Na rit qet deomp coll amzer :
 Deut omp gant intantion
 Evit ar memes commission ,
 Hac eo deomp revelet
 Emedi aze hou reget .
 Caer ho po dissimuli ,
 Hor plac'h a so en 'ho ti :
 Lavarit emon amâ
 Gant an hini a gar myya
 Eus an oll grouadurien .
 Pere a vev hac a dremen ;
 Hat eo én a bed anez .

Da zont brenjan da gontacti,
 Evit beva assambles.
 Ar rest eus o buez.
 N'en em arrêtan qet da veuli,
 Da fougueal, da bompadi ;
 Hi a voar manifiq
 Peguer mad eo, peguer pinvidic
 Anfin, un den ar guella
 A guemént a zébr bara.

R. E seblant ous ho clèvet,
 E ve an afer decidet.
 Me gred oc'h bet er Chademi,
 Potramant er Philosophi,
 Rac parlant a rit evel ar fur Caton,
 Gant oll eloqanç ur Ciceron.

D I S C O U R S

*Evit goulen ur plac'h da zemezi mar be ar bângere
 ma medi ar Plac'h, ha mar be goulen net goude diji*

G. **A**BARS ho quittât, Compagnunes,
 AE trugarecân ho madelez
 D'hór beza recevet en ho ti,
 Ha roet dêomp da zijuni,
 E tiscléryân e zon carguet
 Da bresanti deoc'h ur reqet.
 Laqet oun'e penn ar vanden,
 Hac eus c'hoant e parlantfen :
Avoui a rân gouscoude
 Ouh indign eus an henor-ze,
 Dre n'am eus qet a dalant,
 Discadurez na calz sqiant.
 Ar pez a deu d'am hardissât,
 Eo ma credân oc'h tud vad,
 E viot prest d'am excusi.

Ma teufe din ober fasi,
 En despet d'an intantion,
 D'ober mad va c'homission.
 Rac-se, mar permett din,
 Digomplimant ec'h exposin.

R. Disqeus a rit mil act'a humilité
 Ha qement a civilite,
 Ma veritit sur gant rēzon,
 E rofemp deoc'h hon attantion.
 Pinvidiq ha den honest,
 Beza savañt ha modest,
 Zo galiteou ar re gaera,
 Mes nonpas ar re gommuna,
 Ha gouzout trugacecât
 Evit ar zervichou mad,
 N'eo qet certen au hent fall,
 Evit obten c'hoas re-all.
 Parlantit eta hardimant,
 Hac exposit ho santimant,
 Ha diouz ma zeo ho commission,
 Ni a vo prest da entent rēzon;
 Mes manifiq e ve parlantet,
 Hac e ve hor pennou goloet.

G. Bez em ens hirio an honor
 Da bresanti dirac ho tor
 Un den yaouanq leun a^r furnez,
 Hac ens oc'h anaoudeguez;
 Ur merq bras eus e sqiant,
 En m'en deus preferablamant
 Choaset unan eus ho merc'het
 Evit beza e bried.
 Gouzout a rit eo dija
 Publiet teir guech ar bromessa;
 Ha n'on eus den clèvet parlant
 Anep seurt ampechamant,

Nac e vet èn 'eni opposet
 Da retardi an eured ;
 Rac-se omp deut d'he fèdi
 Da zont hirio da gcontracti.

R. Me a zistro eus a gampagn
 Diouz a gostez an Al'amagn ,
 Hac eus deg mis n'ont qet bet
 Dre amàn en oferen-bret ;
 Rac-se oc'h afer demezi ,
 A so din-me nevesenti.
 Aboue dec'h e mon o redet
 Evit guelet va mignonet ,
 Hac e sonjen voa evidon-me
 Edo amàn an assamble ;
 Hac e voa preparet ur banqet
 Gant ar joa ana voan distroet.

G. Ato dious costez ar vaouez
 E ve clasqet cant digarcz ,
 Ha na oufac'h qet evit petra ,
 Nemet evit delc'her an dud en o za.

R. Ne glasqàn qet digareou ,
 Mes exposi va rëzoniou ;
 Gortos a rangit , rac ar mab eus antì
 E deus goāl faoutet e fri ,
 Nonpas ouz em ganna ,
 Mes o fourra butun enñâ ,
 Hac eo redet d'ar marc'had
 Da glasq un ados d'e c'hriad .
 Mes da c'hortos ma teuy d'ar guear ,
 Rac ne zaleo qet mevar ,
 En deus va dalc'het me amàn ,
 Evit respont evitân :
 Rac-se e tisclêryàn deoc'h ,
 Ententit mad , mar plich gapeoc'h ,
 Ret e ye pare mad e fri .

Abars caç ar plac'h da eureuji,
En aon na ve ar bêleg spontet.
O velet ur fri quer faoutes.

G. M'en devije lavaret din me,

E voa quit da vont qeit-se :

Ia, rac me voar parea

Gant remejou ar re zrola.

An deiz all va marc'h du,

Eur marc'h mat, e creïz e fru

A oue roquet e groc'hen

Gant un tol dant digant un azen :

No pije biquen devinet

Gant petra e meus e bareet !

Gant un tam qic-sal d'e beinseillat,

Hac un anduillen d'e chriad.

R. Cridit din, o redet bro.

E tisqer traou neve ato.

Pa oan e Spagn en afme,

Un dovez mä voa calz arñc.

Abars an eost en nevez amzen,

Ech éruas ur goal affer.

Ur vreg gant un aer o vezas flennet,

Tout he znd a oa nec'hot :

Facil e sonjit ar chreg a varvas ?

Nan : an aer è a grevas.

G. Me n'oun qet eus an dud habila,

Mes adres am eus da scriva ;

Qenta lizer a ris biscoas,

Oa scrivet gant un aval poas.

Ha goude va guella pluen

A so het un anduillen.

Credabl è e scriban mat,

Da viana scritur anatz,

Rac gant qement-se tous,

Me ameus grêt calz a rong.

Ha pa bresantàn ur reget,
E vezàn diouc'h-tù selabuet ;
Há na bretanjan qet brêma
Beza dalc'het reir ama.

G. Me meus aon na vec'h gasconet
Tud cüstum da redet ,
Gant ho fri ato en ær ,
Nonpas evit attrap flêr ,
Mes evit santout c'hoes vad
Dre b'ini e ve anat
E pelec'h eus qestion frico ,
Evit en em renta eno ,
Hac e clascont mil digare ,
Da gadout lod eus ar molarje.

G. Choui a so savet mintin
Da laqat an dud da c'hoarzin ;
Mes an amzer a ya en dro ,
Rac-se astomp afo.

Ia ; ur gascon en deiz all
A ras un dro n'oa qet fall ;
Rac evel m'en devoa clévet
Oa qestion eus un eured
Gant famillou a gonseqans ,
Tud pividic hac a brestans ,
Just deis ar veladen ,
E leqeas en e ben
E vije manifiq deza
Mont di ive da leina.
Evel m'en devoa calz a speret ,
Ne voe qet pel ambarasset
Evit caout un digare
Da gomz ouz tad ar plac'h nevez
Ar gompagnuez a voa èrruet ,
Ha den mui na c'hortoet .
Neuse ec'h antreas ar gascon ,

Gant reverangou a fècon

Anfin , squis o saludi

E lavaras da vestr an ti :

Me meus evidoc'h un affer pressant ,

A hel talvout dec'h cals arc'�ant ;

Fachet oun doc'h interrompi ,

Mes ne qet un dra da ziferi.

Ar mestr a lavaras d'ar gascon :

Chomit da leina , va mignon ,

Ha gonde-se var hon abaster ,

Ec'h ententimp ous an affer.

Pa vœ grêt ar regal tout ,

Ha deut ar poent da vont er rout ,

Ar gascon neuze a lavaras :

Cetu amâ an afer bras.

Gant ho merc'h e meus clêvet

E prometit rei cant miñ scoet ;

Mes , mar qirit , me e c'hemero

Gant an anter eus anezo ;

An anter all o chom ganêc'h ,

Setu eur gonit caër déc'h .

An tad ne gavas qet dereat

Beza evel se goapeat

Credabl è en em fachas ;

Mes ar gascon a bartias :

Buan e renqas trei e gueim ,

Mes attrapet en doa e lein.

R. Ni nomp qet gasconet ,

Mes tud sincer , guir Vretonet ;

Neo qet leinou a glasqomp ,

Mes ar Plac'h néve a c'houleñnomp .

G. Me gred oc'h un den ar guella ,

Ha ne ve qet mad ho trompla ;

Et ve pee'het oc'h amusi ,

Ha piemes ho retardi ;

Ar pez zo aruet ganêc'h :
 Abeue-dee'h ho plac'h yaouang
 E deus chenchet a santimant.
 Me à da êt eus ar vro
 Hac e sonjet e oan maro :
 Mès evel ma oun en em gavet,
 E deus dinme diguemennet
 N'em boa nemet en em avanc',
 Hac em bije ar breferanc'.
 Qér buan diouc'h-tu, eb retardi,
 Oun diredet d'he saludi,
 Hac e ran hirio gueladen,
 Cetu aze un obaden.

R. Ia, va c'homper, obaden a ve,
 Ma ho pe grêt ar seurt tro-ze ;
 Hac abars fin an obaden,
 Ec'h astenfot hir ho mouren :
 Rac ni ranqo guelet
 Var betra oc'h en em fontet.

G. Me am eus clêvet dija
 Meer a guilloq o cana,
 Hac evit ne doun qet c'hoas eos,
 Em meus guelet meur a vleis en nos.

R. Laquit eves : eus ho parlant,
 Ne vec'h vel ur zoudard vaillant,
 A so prest da guemer tout,
 Hac a deu gant e zach' gollo en e rent.

G. Salocras, e guirionez,
 N'eo qet me eo hennez.
 Me a so bet creis an teniou,
 Ha pa velen ar volejou
 Pell dious creta na tee'het,
 A lance an enemiet,
 Me a baqe anezo
 Da deuleur adare outo :

Setu penos emeus an honor
 Da ziztrei amâ ganf ar victor,
 Hac hirio e contan ive
 Em bo ar victor adare.

R. Un den terrubl oc'h, var ho meno;
 Mes piqu a sonj dêc'h ho credo ?
 Ni a oar o redet broyou
 En em samer a varyailiou,
 Hac e rîr coll cals a amzer
 O conta ur bern gueyer.
 C'hoant oc'h eus-hu d'hor sponta,
 Hac d'hor c'hass quit eb netra ?
 Ni nomp qet prest da cedi,
 Hac e ve ret deomp procedi.

G. Allas ! evit gant procesou
 Ne avancimp qet hor fortuniou.
 Dont a ra brêmâ em speret
 Un histor ameus bet clêvet :
 Peñaos daou zen o pourmen,
 A rancontras uit histren :
 Setu chican etreso
 Da c'houzout da biou e vezoz,
 Car pepini a bretante
 E oa deân en tenzor-ze.
 Mont a rejont e proces ;
 Mes souden o deoüie mez,
 Rac ar barner, eb cals pledi ;
 A gavas moyen do unani :
 An histren a zigoras,
 Ar pez a oa enni a dennas,
 Ha goude debri an histren,
 E roas dê peb a groguen.

R. Gouzout a rân, coulz ha c'houf ;
 Ne dileer jamez cals procesi,
 Ha penos ar procesou

A révin cals a famillou ;
 Mes an oll a voar ervad
 Ne qet me a glasq chicanat :
 Hon affer ni so commancet ,
 Hac a dle béza finisset :
 Pe ma fell déch résista ,
 Bezit sur e rancos pêa.

G. Lézomp éta ar procesou ;
Hac en em ententomp hon daou.
Mar cedit ar plac'h-mâ gane ,
Me gavo un all d'ho toare ;
Unan hac a voar menaji :
Ha mont a ran déch d'e brouvi.
An deis all e voan o chasseal ,
E yis en ti en eur basseal .
Hac e doa uset eur c'houlaouen ,
Evit clasq eur gos spillien.
Admirit éta pebes greg ,
Uza ur c'houlaouen a vennec
Evit ur spiller dic'horset ,
Ha c'hoas ne oe qet bet cavet ?

R. Mar doc'h bas-valan , comzit ouz onnes .
Da varc'hadour an alumettes ;
Pe otramant , mar plîch deoch ,
Goulennit-y evidoc'h ;
Hor plac'h-ni-so en ti-mâ ,
Roet e deus Demp e fromessa ,
Gant consantamant he zud :
Clêvit gante , nint qet mud.

G. Seblantout a ra ous ho clêvet ,
E ve an affer decidet :
Ha mar d'e guir qement-se ,
Ne qet me mui a rei dale.
Permetit din un nebeudic
Ma rim brêma ur baleic ,

Da c'houzout hac én so en ti
Eur plac'h contant da zemezi.

En ur bresanti ur Plac'h Yaouang!

Sellit amàn , va mignion ;
Homàn so ur plac'h a fêcoh :
Mar d'eo contant ha d'ho toare ;
Bezit grêt eta evelse.

Compliment da ur Plac'h Yaouang!

G. Bonjour d'ec'h-u , Plac'h coant ,
Fleuren fresq , bojet charmant :
Certepamant n'eo qet c'houi
▲ dle chom hep caout parti.
Plijet , goude ho coulenou ,
E ve cacet hoc'h embannou .
Hirio n'ellomp qet dale ;
Ur vêch all a so adare.
Ma noc'h get erfat contantet
Gant an objet so presantet ,
E zan c'hoas d'ober ur bale ,
Da glasq unan vo d'ho toare.

R. Holla ! ni nomp qet tud fall
Da guemeret tra un all ;
Ar vreg-se a so perc'hennet ;
Nemet bez e ve divorcet ;
Eus ar seurt-se mallig hini
Ne deuy ac'han ganeomp-ni.

Da un Intanvez!

G. Arca eta ; Plac'h yaouanq ,
Petra eo ho santimant ,
Pa velit ar re o deus bet
Hrest adare da gaout fred ?
Ha na garit hasta afô ,
E moc'h e risq da golt ho tro :
Va excusit , maoues vad ;

20

Permetet eo badinat :
Neo get éruet c'hoas
An hini a dle ho choas.

R. Mar guelit begou he boutou,
E velot souden he seuillou :
Me gred sur e zoc'h den habil,
Mes diana och difficil.

G. Non eus tam ebet disprisjet
Au objet a so presantet ;
Hac evel neus cos voutes
Na gaver dezi parres ,
Onnes ive , aboues guedal ,
Me gred a gavo ur chanç all.
Ne nomp qet deut eviti ,
Ha ne sonjomp qet enni ;
Mes evit an hini so embannet ,
..... è hanvet ;
Hac evit he designa mad ,
..... è he zad .
Ne glasqit qet digarei ,
Assur ema en he ti .

R. Scér è , pa en explicit
Eus a bini e parlantit ;
Mes ret eo goulen ouff
A contant eo da zemezi .

Mont a ra da ober ur bate.

Ous an dol emeu hi caset ,
Tranqilamant bras asset
Hac e deus lavaret din-mé
Ne voar qet piou a so aze .

G. O ! va mignon , ar respond
A so tout-fét d'hon doare :
Disques a ra e zé prudant ,
Ha mestres d'he saantmant .

Evel pa lavarfe c'hoas
 Ne rose qet he dorm da bep goas ;
 Mes epqen d'an ini
 A so destinet dezi :
 Ennes è just a so sma.

Ne broposan nemeta ;
 Rac-se se eta , grit demp antren ,
 Coulz hac an olt ens va banden.

R. O ! va mignon , c'houi oc'h eus talant
 Da drei an traou d'ho santimant !
 Mes gouzout a rit an habila

A el ive fasia ;
 Rac se , bremâ permetit
 Ma leverin en em dromplit.

Mâr dê ar plac'h-se azeet ,
 E zeo occupet hè sgeret ;
 Ha pa he deus roët ar respont-se ,
 Ouz traou all è sur e sonje.

Rac amâ e zeus en em gavet
 Aleis a dud d'on guelet ;
 Joa vrás hon eus ôuto.

Gant qementse , evel atb ,
 Eo en em gavet qer just ha tra
 Da veza prim ar hara.

Dre chanch gouscoude dec'h oa deut
 Ar meliner laer gant ar bleud ;
 Hirio eta me ranq poazat ,

Hac ar plac'h-se ribotat ,
 Hac ouspen qementse c'hoas ,
 Dey eo da rola an toas .

Rac-se n'oc'h ens qet a voyen
 Da gaout hirio hon semelen.

G. Ma neus qen ouz ho tiêta
 Nemet primeri a vara ,
 Deut ganén-me tout a vandem .

Da gundai ar fémelen :
 Ni hon eus ur zal vrás preparé,
 Tapisset ha fleurachet.
 Poaset bara , qig ha stripou ,
 Paste , fars-forn ha scotennou :
 Un dol hir a so savet
 Evit ober ur banquet :
 Na c'hedomp nemet ar plac'h nève
 Evit festa molarge.
 Pa vezo deut ni a ray frico ,
 Ni a gano hac a youo.
 Ac'hanta ta , va mignon ,
 Petra a lavar ho calon ?

R. Qemént a rit ho pledi ,
 Em be c'hoant d'ho contanti :
 Gouscoude e ven diréson
 Lezel va stal en abandon ,
 Car certen eo evit merc'het
 Ne qet ès dìn da zivouered :
 Ispicial an ini
 A fel deoc'h da reqeti ;
 Mes c'houi a so grèt ho labour ,
 Ha noc'h eus ezom a zicour
 Nemet da gana ha da youal ,
 Da fricotá há da zançal .
 Setu amàn ur pot boujant ,
 Hae a dalo dèc'h qeit ha cant .

G. Bo ! ne qet da glasq ar seurt-se
 Oh-me sur lajet da vale ;
 Têc'h alesse , cos marmous ,
 Ni ne glasqomp qet ur mous .

R. Ma cavit ennes re dister
 Evit obet oe'h affer ,
 Cetu amàn c'hoas tu all ,
 Hac evit ur gueil n'eo qet fall ;

Ia - da , cetu - un all ,

Ha mar guel sclér n'en deo qet dall.

G. Bonjour déc'h-u , va den mad ,

N'où eus nemet tostât .

Me gred eo dre guriosite .

Oc'h en em bresantet aze ,

Evit guelet hor plac'h coant ,

Evit choas ho santimant .

Mes bgn affer-ni so da

Hac e fell deomp he fin

Mar teuit amàn d'om

Bon tro ni ray bale :

Ni ho paeo herves a luis ,

Gant ar memes monis .

R. Lavarit din me , me ho ped ;

Ha mèr'het ho pro so decedet ,

Ma renqit dont qeit-mà

Da glasq merc'het da fortunia ?

Me gléo lavaret e Breis

E zeus merc'het aleis ;

Ma rafac'h ur bournaden

Ec'h alfac'h guelet meur a vänden ;

Ha marteze , abars fin ho tro ,

Ho pe ar choaz eus anezo :

Evit amàn n'e deus nicun

Contant d'ober he fortun .

G. Lavarit din-me da guenta ,

Petra zinifi promessa ?

Me mens cléyet e peb amzer

E tleer delc'hèr mad d'ar guer .

Or , unan eus ho merc'het

He deus d'an den-màn prometet

Feiz vad ha fidelite :

Ni so deut da glasq an dra-se .

R. Penos eta , me am boa crèdet

E voac'h-u den a speret :
Guir eo ar seurt-se avichou
O deveus ive ureou.

Quamdoque bonus
Dormitat humerus.

Ha credabl eo e ve en ti
Ur plac'h contant da zemezi,
Hac e ve êt qeit-se ar brud,
Hep ma ouffe netra e zud !

G. Pa ho clèvàn ho parlant,
Me vel oc'h eus cals a dalant,
Teod mad ha descadurez,
Mil insign ha mil adres ;
Ec'h ouzoc'h forgi guevier
Evit tremen an amzer,
Hac e fel deoc'h gant ho latin ,
Hon amusi-ni da c'hoarsin ;
Mes , hac e vec'h avocat ,
Pa noc'h eus qet ar gos vad ,
Me a esper ho fêza ,
Hac a c'hoarzo da ziveza.

Ridebit bené
Qui ridebit in fine.

R. Credabl eo em be riez ,
Ma rancfen coll va froces ;
Mes abars ma refot dîn-me plega ,
Esquizot c'hoas en ho sa.
Selaouit mad , va c'homper ,
Pec'het eo coll an amzer ;
Eur poent a so da bep tra ,
Ha bremâ eo poent finissa .
Diou vech emeus goulennet
Ac'hann ar plac'h a eured ;
C'hoas daou c'her all diou vech anter ,
Decidomp buan an affer .

Eur vech , diou vech , teir guech :

Setu me brema direbech.

Roit din brema ar plac'h ,

Pe è zàn quit gant ar zac'h .

Ar banquet a so preparet ,

Ha bezit sur e vo debret ;

Goudese ni a velo

Pe c'houi pe me a baco.

G. Ous ho clèvet-u , mestr parlanter ,

E rafac'h prest un tasqigner ;

Mes mar distroit adare ,

Ne vo atq' nemet dale ;

Rac-se , evit nriret ous tamal ,

E zàn amàn d'en em sonjal .

Ar pez a ra din differi ,

Ep. an ezom eus anezi ;

Car ouspen ma zeo tr plac'h coant ,

Leun a furnes hac à sqiant ,

Eo dilijant en he labour ,

E peb affer prest d'am zicour .

Mes mar oc'h eus-hi decevet ,

Ha hija en em brometet ,

Allas ! he c'halon a ve eno

Hac amàn enep he meno .

C'houi c'hoas am gourdrous a broces :

Peseurt cuden e ve honnes !

Mont e proces a so ès ,

Mes n'eo get facil dont ermès .

Ma c'harufe ganén coll ,

Setu me souden fars an oll .

Coll va zud ha va danves ,

Crevi a rafen gant ar ves .

Guir eo me a ell pretantí

Oc'h-u deut d'am attaqi ;

Oc'h eus ampechet ya foasaden ,

Ha daleet va ribotaden.

Mes ne garan qet ar chicanou,

Ha nebeutoc'h c'hoas ar misou.

Alon , dont a ra em memor

Oc'h ens grêt din an henor

Dam pedi da vont d'ar banget,

Hac oc'h ens memes pedet

Qement so em c'hompanagnenez

Da vont ive assambles.

Eb bien , eno en ur banne guin

Me a veuzo tout va chagrin ,

Hac a lavaro couls hac un all :

An affer-ma ne deo qet fall ;

Rac-se , evit en em accordi ,

Pa viot prest , deut en ti.

Complimant d'ar Vreg yaouang.

G. Debonjour deoc'h , Plac'h nevez ;

Me o salud gant levenez.

Ne qet va c'hondition

Dont aman dêc'h da zermon :

Lezer a dleer qeimentse

Gant an neb o deus otorite.

Mar plîch ganec'h dont d'an ilis ;

Eno ar bêleg , ervez e ofis ,

A explico dêc'h santelez

Sacramant ar briedelez ,

Hac an obligationou

A gcontract ar priejou.

Me a mens grêt va c'hommission ,

Chanç vad deoc'h hac union.

Complimant d'an Ozuch-yaouang

Choui ive , va den prudent ,

A verit ur c'homplimant ,

Mes gen nebeut ha ya c'homponnon ,

Non qet approuvet evit sermon.

Me souet deoc'h digant Doue

Peb chanç-vad ha prosperite.

Setu dirazoc'h an objet

Goulenet hác accordet :

Mar don bet ous ho retardi ;

Na gavit qet dies va excusi ;

Gouzout a rit an usach comunit,

Pa ves-questiōn eus a fortun.

Bremàn, mar doc'h prest, astit a fo,

Ne qet me mui ho taleo,

Nemet ma refot peb a vanne

D'am c'hamarad coulz ha din-me.

DISCOURS EVIT GOULEN UR PLAC'H DA EUREUJI.

SALUD, Compagnuez, gant ur galon ardant,

Eus a greis va c'halon e ran va c'homplimant;

Ma vouisen an tu, ar fēcon d'en ober,

E ve va brassa joa plifjout d'oc'h oll douster.

Peb action gaer d'he ober pa zeomp,

Dre ar sin eus ar Groas ato e commançomp :

En hano an Tad, ar Mab hac ar Speret-Glan,

Zo tri Ferson distinct en ur memes unan.

Aboue ma voan bian var brec'h va maguerez,

Me am boa an desseign da antren er Pales ;

Mes èru eo an deiz, an amzer er vech-màn,

Ma meus bet an henor da zont betec ennàn.

Evit beza hirio antreet en ho ti,

N'ouzoc'h qet, marteze, tenor va c'hevredi :

Me zo ur messager zo amàn digasset,

Qazi hep gout an hent gant an den a enréd.

Mes pa zon digasset eus e heurs ho pete,

Me a ray e excus ha va hini ive.

Qent avanç davantach, e zàn d'en em adressi

Dêch'-u , ô va Jésus ! hor Chroter , hor Messi :
 C'houi eta , va Jesus , a r̄ei dîn ar speret
 Da expliq̄a pep tra evel ma zeo dilect :
 C'houi a ray dîn ar c'hraç , pouvoar hac eloq̄anc ;
 Sclérijen d'am speret da gomz en ho presaç :

Va bolonte ha ya desseigu eo hirie an de
 Da anonç deoc'h evit ar guir Roue ;
 Mes c'hoas e c'houennan da Rouanez gant'an
 ar verc'h eus an ti-màn.

Ebien plac'h yaouanq en em strinquit d'an daonha ;
 Da c'houi benos ho Tad , qent mont da eureuji ;
 A beurs Doue an Tad e zeo decomp ordreuet
 Ne ancouefomp qet nep en deus hor maguet.

Benos Doue an Tad a c'houlan da guenta ,
 Guir Grouer ens an ên , Gouarnier ar bed-mâ ;
 Mes guelet e iân c'hoas , pa remèrqânerfat ,
 Penos e coe daerou demeus ho taoulagad.

Ne qet ar pez oc'h eus grêt eo o cra contristet ,
 Mes guelet ho Tad , ho Mam , penos int desolet !
 Ahas ! râzon o deus ; ne dê qet hep sujet ,
 Guelet e teuit da guitat nep en deus ho maguet ;
 Gant qement eus a soign savet bete vrâmân ,
 Qemense a laqa o ch'alon da rannan.

Arca , Tad truezus , distroit ho taoulagad ;
 Var ho Merc'h a c'houlen he mennat .
 Entedi d'an daoulin dirazoc'h prosternet ,
 Deus a greis he c'halon o c'houlen he souet .
 Ha c'houi , Mam desolet , roit ho pennos ganti ,
 Gant ho merc'h da eureuji . — Ia , ia , ia .

Hola ta aoüalc'h è qemense ,
 Oboisset oc'h eus da Chourc'hemen Doue ;
 Grêt oo'h eus ho tever gant guir hunnilite ,
 Ha Doue na c'houlen nemet guir volonté .

Eh bien plac'h sur ha désquet mat ,
 Avaut bo paziou eyit mont bete ho Tad ,

Ha roit dezàn daou boq' eus a greis ho calon ;
 Pa oc'h eus obtenant e veaediction.
 Distroit c'hoas eus ar' vam pini e deus ho cænet ,
 Ho livret da zemezi , pa oc'h eus souhetet.
 Mes c'houi ta , Tad ha Mam , meurbet oc'h contristet ;
 Occasion oc'h eus , n'en deo qet hep sujet.
 Mes ho merc'h a zo fur , instruet mat e ze ,
 Ha n'e deus grêt netra enep ho polonte.

Qent avanc davantach , me c'houlen eviti
 Conje he breur , he c'hoar , qent mont da eureuji :
 Paeron ha maeronez , mar emaint var ar plaq ,
 Me c'houlen eviti ho pennos diganac'h.
 C'houi ho poa contractet en Ilis eviti ,
 Ha hi c'houl ho pennos qent mont da eureuji .
 Bennos he oll ligne , conje hé oll querent ,
 Cetu ar seul sujet ma omp-ni deut en hent .
 Bennos ar re so maro n'allan qet da c'houlen ,
 Rac calz a galonom contrist a laqafen .
 Guell e zeo ur beden d'ar re so decedet ,
 Eguet goul o c'hanje , pa na maint var ar bed ;
 Dre ze en ho pedan da lavaret ganén
 Ar salm eus an Ilis e repos d'o ene. *De profundis.*

Arça , compagnuez a zo aman presant ,
 Me zezir ar boneur d'o renta oll contant ,
 Mes ne mens qet , siouas , speret an oll æle ,
 Da gontanti peb-unan , bervez e volonte .
 M'am bije ar pouvoar en doe Alexandri ,
 Pa voa bet prisonier er guer eus a Vitri ,
 Ennes a zisqare , gant moez e drompillou ,
 Seiz muraill cimantet en dro da Jerico ,
 Potramant ar pouvoar en devoa Josue ,
 A laze en combat sez ba trégont roue ;
 A arrette an eol un heur anter en ser ,
 Pa voa o combati , vit rei dezàn sclerder ,
 Potramant ar surnez en devoa Salomon ,

Pe an talenchou caer deus an doctor Ciceron ;
 Me forje un discours a vije d'o souhet ,
 Nonpas deus an anter ar pez a veritet.

Eh bien , compagnunes , en em rejoisset ,
 Setu bet demp an hini pini'r boamp deziret ,
 Hac hi quer caer hac an de pe an eol ardant ;
 Memeus hor c'halonou a rento oll contant.
 Car e hini e unan zo pareillant gyê ,
 Vel ma ve an deillou er gue e fin ar mis mae ;
 Memes qen a sonj din an devez a borie ,
 E deveus astennet deg vlates eus va bue .
 Grac demp d'en em velet er Pales celestiel :
 En hano an Tad , ar Mab hac ar Speret-Santel .
 Eno gant hon Ael madni vo representet
 Pa vo ret renta cont dirac Salver ar hed ;
 E vo lennet an decret hep hor favorisân ,
 Demeus o meritou vo barnet peh-unan :
 Eno na gaqeto nac ennont nac homân ;
 Aoüalc'h hor bezo tout d'en em justifian .

Mar emeus choquet den dre re a liberte ,
 E c'houlân mil excus digant ho majeste ;
 Mar emeus choquet den na drouc laret netra ,
 Deus a greis va c'halon excus a c'heulennan .

Arsa , compagnunez , ha na drouc sonjet qet ,
 Na laret goude se e meus-me e laret ;
 Bet emeus ho conje , gant ho permission ,
 Me ho trugareca eus a greiz va c'halon .
 M'o ped d'am asista evit he c'hundai ,
 Ma zefomp gant henor d'he chas da eureuji .

RIMOU EVIT GOULEN HA REI PLAC' HET DA EURE

ORSUS eta , compagnunez ,
 En em retirit tout a gostez
 Evit m'am bo an avantach da barlant
 Amân en ho presanc , en langach eloquant .

Ne ouffen ober guelloc'h tra
Evit oher Sin ar Groas da guenta.

In nomine Patris, et Filii,
Evellen e-commançan ganti.

Ma ven guelet en Bro-Zos oc'h ober qement all,
E ve lavaret e ven un aïllon pe un den fall ;
Mes er vro-màn ne estimer netra

Anes ober Sin ar Groas da guenta.

Et Spiritus-Sancti, Amen.

Evit êchui va feden.

G. Debonjour ha joa en ti-màn,
Ne des qet a chom ennàn ?

R. Ia, va mignon, un action vad oc'h eus grêt;
Dre Sin ar Groas poc'h comancet;

Me ive a ray coulz ha c'houi

In nomine Patris, et Filii,

Hac evit êchui va feden,

Et Spiritus Sancti. Amen.

G. Hac e ven e Pales ur Roue,
Me ne ven qet trêtet en daill-se,
Na zigasse pot pe laqes
D'am hentcha da vont d'e bales ;
Mes c'houi ne zigassit hini
D'am hentcha da zont d'o ti.

R. Amàn e zeus un ozac'h coz e qichen an tan,
Var hoez rîi ur c'hornedat butun dezàn,
Hac o hentcho couls ha nicun dre ar vro-màn.

G. An ozac'h coz-se a gafen mat
Da gass ar zaout pe d'o c'herc'hat ;
Mes nonpas da fizout ennàn
Ur gompagnunez evel homàn

R. Lemmet oc'h eus ger soubl ho teod,
Na gafet ennoc'h nep defot ;
Preparer mad ho tiscoursiou ,
Ha studier ho langachou :

Sac'hat oc'h eus a langach gread,
Me zant ar c'hoez eus bo tillat.

Fochit ha plantit en tu mar qerot,
Me a ziboulodo dre ma labourot.

G. Clêvet em boa , qent dont amâ ,
Choui a barlantche a draou ar re vella ;
Diouzoc'h , va mignon , e c'houennan
Pegueit e voe Doue o croui ar bed-mân ,
Hac ur vinien a voe plantet ,
Evit pe fêçon ei finisset ?
Setu aze teir guestion
A c'houennan ganêc'h , va mignon .

R. Ignorant e ven a dra sur , va mignon ,
Ma na expliqsen dêch ho teir guestion.
Bremâ souden , en ber amzer ,
Me o explicò dêch , en daou c'her .
Ar vinien a voe plantet
Evit disquel e voe ar bed-mâ crouet ;
Ha displantet e voe adare ,
Evit disquel e finisje .
Ha c'hoec'h de e voe Doue o croui ar bed-mâ ,
Hac ar zeizvet d'e zervicha .

G. Ervez ma ec'h eus raportet ,
Choui a zo demeus an doctoret ;
Mes mar deo guir oc'h doctor , va mignon ,
E ranqit douguen ar chantillon
A ve var ar scoa glei staguet ,
Evit ma viot dre ar merq-se anaveet .

R. M'am bije me certen goueset
E vîjec'h deut hirie d'am guelet ,
M'em bije deoc'h ur fest préparéet ;
Griou liqad ha re alec ,
Treid siliou ha re arinqet ,
Pêvar gartier ur gelhyenen ,
Ne dorjac'h qet ho tent evit crignat an esqern

G. Dont

G. Dont a ràn d'en em estoni,
 Pa glèvàn peguer caer fest o poa Demp da brepari ;
 Mes mar qirit dont dissul d'an oseren bret ,
 Ni a brepañ deoc'h ive ur banqet :
 Ni a rai deoc'h un tam yod silet ,
 Hac a laqay ho reor dà redec ,
 Oc'h asistanç , compagnunez ,
 Me o ped da lacat eves ,
 Rae ur goal barti a velàñ amàñ ,
 Mil aon ameus na gollin gantàñ ;
 Mar deu din coll e guirionez ,
 O pezo mez ive , va c'hompageunez .

R. M'am hije me certen gouezet
 E vije ar brezel ganeoc'h discleryet ,
 M'em hije preparet va c'hanoliou ,
 Va fistolennou lêt ha va mousclejou ,
 Fusuillo sco ha boulejou stoup ,
 Da simei ganeoc'h-u var ho chouq .

R. Ni so ur vanden treminidi ,
 O vont da Vrest da ambargi ,
 Hac hon eus urz gent ar Gouarnamant ;
 Va mignon , d'ho laqat en hon rejimant ;
 Ha marteze da vont oa Orleanic ,
 Ervez urzou ar Monarq eus a Franc :
 Hac hon eus urzou a so crén meurbet :
 Grêt e broces en ur vale ,
 Da vea punisset hep dale .

R. Cren , à creh , compagnunez ,
 Pa velàñ hirio an dromplerez ;
 Pa velàñ e zomp qemeret
 Gant ur vandennat soudardet ,
 E teuàñ da grena gant rëson ,
 Rac aon na vemp oll laqet er prison ;
 Evit dont eno da finissa hor buez ,
 Mar collomp hon rouantelez .

Gouscoude e voa deomp rapportet
 E voa deomp ar peoch' accordet ;
 Var à velan eus trahison,
 Combatomp ta oll a vir galon.

G. Eur groug-lassiq hor boa stignet ,
 Eur gouliq venn hor boa atrapet ;
 Mès , allas ! ne voa qet cre ,
 Hac eo achapet adare ;
 He asquel glei a so torret
 Achap a bell ne alse qet ,
 Hac hon eus clèvet lavaret
 E zéo ama eo disqennet.

R. Dibot procurol en c stidi
 Na ra e blede d'e fantazi ,
 Qen a ve mont en oditor
 Dirac e brocurol control .

Eno e ve laqet dindan e fri ,
 Evit gallout en dibouti .
 Mès c'houi pa voach' en heat o tost ,
 A rē ho plede hac ho cont
 E zaje ganeoc'h ho crœc ;
 Mes , el leal , gortos a refot .

G. Parlant a rit , va mignon quer ,
 Manifiq bras evit hoc'h affer :
 Ma vec'h pignet en ur gador ,
 E ve lavaret e vec'h ur predieotor .
 Mes me laqayo o c'herbedi
 E qement bourg zo en escopti ,
 Evit m'o pezo ur stacion ,
 Ur baros benac evit sermon ,
 Ha ni a yélo tout d'o clèvet ,
 Gant peb henor ha peb respect :
 Me a gred sur , a drá certen ,
 C'houi a gconvertisfe ar bec'herrien .

R. Meurbet ouen estonet o yelet

N'en deut qet en ho toues ur c'hloarec ;
 Mar deu da hini ac'hanc'h fatiga ,
 N'oc'h eus nicum d'oc'h asista.

G. Sevel a ra va bleo en êr ,
 Pa gomxit din eus ar glouer ;
 Rac me so couls gaén guelet ur c'haor en ur golec ;
 Evel guelet en hon touez eur c'hloarec .

R. Den yaouang oun o tont er bed ,
 Gout ar c'hustumou ne rân qet ;
 Rac me ne meus qet studiet
 Evit goulen na râi mere'het :
 Mar deu din lavaret netra sot ,
 Mar plich ganeoc'h va excuzot .

G. Evel ma oun deut da dal an ti ,
 Ne garfen qet dont d'o choqi ,
 Na d'o cepren , na d'o facha ;
 Rac certen an dta-ze ye ar goassa .
 Mes evit cavet tro da harlant ,
 Ma vo a propos va c'homplimant ,
 Excus ha pardon a c'houleñnaù :
 Pa blijo ganeoc'h , comzit bremân .

R. Seblantout a rit bêza habil ,
 Hervez ma velân eus ho pabill ,
 Rac-se e carfen gouzout ouzoe'h
 Petra a glasqi , ha piou oc'h .

G. Me , va mignon , zo un den yaouang ;
 Hao a zo bas eus a sqiant ;
 Ia , me a zo assur qen ignorant ,
 Ne veritân qet en ho presanç parlant ;
 Mes , mar don ignorant , a dra sur
 N'en don qet ignorant dre natur ;
 Rac ma noc'h eus qet anavezet va zad ;
 Me rayo deoc'h anavezqut e vab .

R. Ober a rér din cals a henor ;
 Guelet eur sort compagnuez e tal ya dor ;

Mes ret eo dêe'k eifut lavaret din , va mignon ,
Demeus a betra e zeus qestion.

G. Gant ez on bet sortiet ,
Demeus a dre e garet ,
Da c'houlen dezàn da eureuji ,
. a rîr anez ,
Qercouls ha me , va mignon . oc'h eus élèvet ,
Tri emban sur a so bet grêt ,
A so bet lancet gant ar bâleg ,
Ha fennos , gant ar c'hraç à Zone ,
On eus sonj da gass ar bêvare ,
M'ar deut , va mignon dh'or rebuti ,
Ni a laqayo oc'h expleti ,
Hac e vefet condacnet d'au amand ,
Hac e cousto dêc'h cals a archant .

R. an hostites ,
Zo êt da Gastel pe da Ventreuz ,
Evit en eur bourvei a frice ,
Fea n'eus qet hor grut er vié .
Mont a rî en hent en eur bompat ,
Qen dra halle n'eur c'halopat .

G. Va mignon , na leverit qet din a e'hievier ,
Guell e dêc'h lavaret ho Pater ;
Rac bremâ souden a biou ho fri ,
Me ameus hi guelet en ti .

R. Donec en deyeus lavaret ;
Biscoas den e Rouantelez an ëa n'en deyeus antreet ,
Nemet gant courach en deyeus combattef ;
Mes c'heui , va mignon , n'o po qet ho plac'h ,
Na renqset disput ur pennad c'hoas .

G. Glorius en ho cavân meurbet ,
Va mignon ger , gant ho merc'het :
Gouscôude ar merc'het a so goal bejou ,
Rac sqey a reont evel diaoulou ,
Ha pa ve torret o c'heyelou ,

E c'hoariont gant o c'linqinou ;
 Evidon-me a lavar crenn :
 Biжен en maoues na fisien.

R. Na intourdissit qet va fenn din , va breur ,
 Rac a zo êt da seur ;
 Professet e deus e Montroulez ,
 Ebars en breuries Sant Joseph.

G. Mar oc'h eus c'hoant e vemp migauonet ,
 Ne gomzit qet din a seurezet ;
 Eur seurez , ma ve laqet en pris ,
 Ne dalfe qet he habit gris ,
 Pe mar talsé netra ouspen ,
 Ne dalfe qet he habit ven .
 Ar re-ze a so ato o vurmari ,
 O tispén an dud hini a hini ,
 Ha pa n'eur gavont en ur bagad ,
 E zeont oll d'en ein scandal ,
 Neuze ec'h ouzont pinça , en ur scrabat ,
 A doliou ivin betec ar goad.

R. Na ravodit qet va fenn din , Autrone ,
 Diouz ar pez a c'houennit diganeme ;
 Rac mar ho pe diganeme tennet
 Ar gaera demeus va merc'het ,
 Goude din-nie c'houi a c'hoarzfe ,
 Hac el leal , réson ho pese .

G. Ne grenan na ne chenehan liou ,
 Ma n'am be ac'han , e zin abiou ;
 Rac ar Profet a lavar eleal
 E zeus nao semelen da hep mal ;
 Hac e vemp ganeoc'h refuset ,
 Ni a gavo gouscoude merc'het .

R. Choarvout a ra ganeoc'h eyel ar merdaldi ,
 A ya da poveur da zijuni ,
 Ha goude e vent epad an de o laviga ;
 Allas ! alies o clasq , e magor rabata .

Va mignon , na chomit qet aze d'ober brut ,
Lipit ho peg hac it d'ho clut.

G. Meurbet ho cavàn dives ,
Miret demeus an den-inàn e blac'h nevez ;
E-unan e ranq oza e yod hac o grampoez.
Caeroc'h e ranq d'ober e'hoas ,

Mont d'an ti foru gaut e doaz ,
Ba pa za d'ar vélén da oza e guerch'h ,
E za ar oll merc'het var e lerc'h.

Foi , foi , emezo : sellit ar goas ,
Sac'h an naoues deus e scoaz.

Lavarit din , va mignon qèz ,
Ma vec'h en e blaç , n'o pelef'u qet a vez ?

R. Pa voac'h éru gant an hent ,
Me zonje din e voac'h ur vanden zeut ;
Mes credi a ràna dra certen ,
E zoc'h ur vanden merc'heterien .

G. Me a ya da zivoucla va boutou ,
Evit mont da zispen va roujou ;
Rac evit ac'han , var a a velan ;
N'or bezo netra evit brémàn .

R. Mar doc'h attachet e defot merc'het ,
Me lavaro deoc'h pelec'h e qefet :
Mar qarit mont da Blougôaven ,
E qafot eno ur plac'h evit ur grampoezen .

G. Sac'h ar bier ! ar re-màn eo an dud !
Coulz ar re vrás ha re vnuud ;
Evit qement em eus lavaret ,
Na reont van evit va c'hlévet .

R. Me vel erfat e renqàn plega ,
Terri va gar hep he blessa ,
Ha mont d'e digas deoc'h d'an nor ,
Da c'houi ha c'houi he recevo gant henor .

G. Me , va mignon , a so ur scolaer ,
A so bet e meur a gartier :

Er Russi , er Chin hac er Spagn,
 En Turqui , en Egypt , e Rom , en Alaman,
 Ac'hane e voan deut d'ar guer
 Dre Bloungaznou , Castel ha Qemper :
 Ha n'em boa cavet den d'am fêza c'hoas ,
 Nemet un den a Japon en doa seiz troadad fas :
 Peimp troatad en e zent , zeiz râouen en e veg ,
 Mes eleâl , va mignon , c'houi fat noc'h eus int qet.

Presanti a rér ur Kreg.

R. Cetu amân ur plac'h yaouanq ,
 Hac he deus ur speret contant ,
 A zo diangach a bep lec'h ,
 Hac a dal hirio qeit ha dec'h .
 Ha ma n'en deo qet mad d'ho cout :
 Certen ec'h allit mont en ho rout .

G. Ne douetân qet , va mignon coait ,
 E ve ho ti qen dibourveet a blac'het yaouanq ,
 Na zigasfêc'h unan deomp da velet ,
 Certen ne vezoz qet refuset .
 Mes homiân zo an daill var he beg
 Da veza êt pell so da vreg :
 Me vel merget var he chod - clei ,
 E zeus bet goas o poqat dei ;
 Qassit-hi buan var he guis ,
 Gant aon na. dese - droug avis .

R. Clêvet oc'h eus alies parlant ,
 O comz demeus ur zal gaer ha brillant :
 Ia , va mignon , me am eus amân ur zal ,
 Hac a so carguet a draoué cleal ,
 A bep tu dre he draoué gestez ,
 N'en deus nemet olives hac olifres ,
 Dindan an treid evit pave ,
 N'en deus nemet lorenti ha loren ,
 Ia , ar zal-mân a zo armet
 Demeus ar gaera peder blanten a gafet :

Unan zo **ros**, un al **tulipes**,
 Un al palun haç un al cypres.
 Ha c'hoas n'em eus coptet deoc'h netra,
 Evel a gontin deoc'h bremâ.
 E creiz ar zal-màn eus ur femeleg
 Demeus ar gaera a veljoc'h biqen :
 He muzellou a zo a ros bordet;
 Michang eo houñnes a fel deoc'h da gavet?

G. Va mignon, gout a ouzoc'h erfat,
 Pa gaver an avel e ranquer guentat;
 Ha c'houi, pa gafet discarg d'ho mere'het,
 Me ho ped, n'o refuzit qet;
 Ha c'hoas trugarecait Doue,
 Pa na'reomp eguis Table,
 En devoa da ravissa ar merc'het
 An devez mèmes eus o eured.

R. Getu amàn ur plac'h yaouanq,
 Caer evel an eol brillant;
 He diou chod a so ru evel ar res,
 Distinguët evel an deir diouz an nos.
 He sal a so cäer evel cristal;
 Laqat a ra calon mab da dridal:
 Ha ma na blii qet homàn deoc'h,
 Na oufen petra d'ober deoc'h.

G. Tromplet mad e ve va speret,
 Pe ur banne guin a re am be evel,
 Mar deo honnnes ar femeleg
 An eus grët anêy ar goulen;
 Mes ar plac'h-se, pa zeo deuet,
 Ne deo qet da veza refuset.
 Me so ive un den yaouanq,
 Hac am eus ur speret contant;
 Hac a so diangach en pep lec'h,
 Hac a dal hirio qeit ha dec'h,
 A laqayo va dorm en he hini,

Hac a yêl ganti da zemezi ;
 A rayo outi peb contrad mad ,
 Evel ma eure he mam d'e zad :
 A brometo dêy eno fidelite ha se ,
 En ti , ermès hao-es guele ;
 A zalc'ho mad dêy bete mervel :
 Ne ouffen qet lavaret guel.

R. Arça eta , va mignon qèz ,
 Cedi a rân ganeoc'h ar plac'h nevez :
 Mont a rân d'e digas deoc'h d'an nor :
 Me ho ped d'e receo gant'henor.
 Didostait eta , den nevez ,
 Da guemer en dorn ho mestrez ,
 Evit rêy deoc'h an arvoenti ,
 a rêr eus anezzi ;
 Laqit ho torn en he hini ;
 Ha sonjit penos e pado
 Ho commanant betec ar maro .
 Na deuit qet ive d'e goal-dréti ,
 Na d'e chasseal ermes eus an ti ,
 Evel pa na anavesfac'h qet anezzi ;
 Pe mar er grit , va mignon , clêvit ur guer :
 Laqit eves demeus ar goalinier ;
 Ar goalinier a zorn Doue oll-buissant ,
 A bunisso ar re vechant :
 Da lavaret eo , ar goalinier
 Demeus e fulor hac e goler ,
 Pere a ellomp da evita ,
 O veva en grâc Doue er bed-mâ .
 Pedit Jesus , Roue an Tron ,
 Da rêy deoc'h e venediction ,
 Ha da asista en hoc'h eured hirie ,
 Evel ma ras guechal en eured Cana en Galilee .
 Tachit da gundai ur vuez vad ,
 Hervez Doue hac hervez ho stad ,

Evit ma chieset gantàñ da repos,
E fin ho paez d'ar Barados.

Qementse a zouetàn da guement a so amà,
Ha din va unan da guenta;
Me a ya dà laqat va zoq var va sen,
Evel a die ober pep christen,
Compaghunez, gant ho permission,
Pa meus grêt va dever ha va c'homission.

DISCOURS.

Da lavarat e qichen an ty, da ur Goulen.

SALUD, tud a benor, gant peb soumission,
Stûd a bep qalite hac a bep condition;
Ho ti hac ho madou, hac ho tomentiqet,
Hac ho polônté vad o deus va c'hontraignet.
Larat allan hardi ne voant qet bet biscoas
Gant qement a blijadur e c'hantren en eur plas.
Ho ti a so stituet, qen toén qen muraill,
Eur plas eus a blijadur, ne deo qet eur marvaill.
Au nep en deus composet ar portret deus ho ti
A zo eun den a speret, ne fell qet din doueti.
Ne alle qet, va migaoñ, dont da bêa erfat.
Eun habil architect ma n'en deu da labourat.
Me a zo bet e vale en tals eus a vroydu,
Hac emeus goneet nombr bras a victoriou :
Mes hor Zalver beniguet a zo marvet er groas,
Qercouls vit ar pinyidic vel vit ar paour, siouas!
Eun amitie sincer e zeo va hervridi.
Eur femelen yaouanq zo maguet en ho ti,
Zo evit eun den yaouanq a zo eus va c'hanton,
Ne qet bet sur eul lach infidel ha poeltron,
A so deut hirye'n de d'e assignation.
E hanoo so..... brema n'el lavarin;
Mes m'en en lavaro qentoc'h ma finissin.

Prest on da finissa hac i've da gominanç:
 Ma parlantàn davantach, me am bezo setanç.
 N'estimàn ur procuror o tifén e gojou,
 Ma na c'hone e broces ha dioute ar gaouï;
 Rac ma qavàn mé c'hoas teir guech en odianç,
 En durant m'er selaouïn me am bezo setanç,
 Rac Roue absoku on, mär qirit va c'hredi,
 Pa c'houleniùn va hévridi, e ranqit e rei din.

Me eo ar Roue Artur, puissanc souveren,
 Breiz-Izel en antier so dindan va c'hourc'hemen :
 la, en assuranç, Roue d'ar Vretonet,
 Hac Autrou en Breiz-Izel d'an Noblanc ha Princet.

Da guenta, evit commanç, Breiz so dig en antier,
 Montroulez ha Lanneur, Lannion, Landreguer,
 Pontivi en antier, bete guele Leon,
 Castel-Lin, Porz-Louis, ar C'hroazic ha Croson,
 Ar Faouet ha Sänt-Nic, Cast, Moelan, Pouldaouen,
 Ha Qimper-Caourantin, Castel-Pol, Lesneven,
 Plestin, Garlan, Plouyan, Langonaval, Guimel,
 Lomiqel, Plouezoc'h, Plonganou, Sant-Briec,
 Guerlesquin ha Benac'h, Callac ha Qer-Ahes,
 Plourin, Sant-Yan, Rosco, ha Plounéour-Menez,
 Hac ar guer a Roazon, elech ma chom begret
 Parlament Breiz-Izel, hac e brezidantet,
 Qeriti ha Qirias, Perros ha Lanvelec,
 Lambal ha Sant-Malo, Dinan Sant-Thégonec,
 Pleiber-Christ, Comanna, Plougoven, Locqirec,
 Pontrelo, Plufur, S. Seo, Guiclan ha Pontmenou,
 Plouaret, Enez-vaz, Callot hac ar Ponthou,
 Plouescat, Plouizi ha Castel-an-Taro,
 Hac ar blenen humid a ra dezàn an dro;
 Coatreven, Pedernec, Pempoul, Plegat-Guerand
 Hac erfin, qement so dindan ar firniagnant.
 Arça ta, Plac'h-yaouanq, va guir bried fidet,
 Cetu c'hui Rouanes ehrs en Breiz-Izel;

Cetu c'houi Rouanez var c'héryou meus hanvet :
Bezit eta contant eus ar fortun a ret.

Goulen.

*G. Tu poza suposa sponta in guelea,
Goudea conjungo vita multiplia.*

Qement ma zeo tennet, moc'h assur, mignonet,
Eus an naövet chabist a grëation ar bed.

Pa voan-me deut en dën-mä deus ar guêr,
Me a voa tristoc'h calz eguet ne voe Sant Pêr
Pa nac'has e Vestr mad goechal e ti Pilat ;
Rac chomet voa en ti evit-digareat.

Qent ma voan deut en hent, me voa en em voes,
Prest da zantes Agnes, patrones ar merc'het,
D'am Zant paeron ha d'am Zantez maerones,
Evit goulen ar c'hraç da c'honit va froces.
Me ya da retardi bremàn va c'homplimant,
Va mignon qer, evit clèvet ho santimant,

Qenta coupled.

R. N'eus fors absolumant :
Réd eo da eun den pârlant ;
Ma na respontomp qet an dud,
E téusent da lavaret e vemp mud.
Sonjet on eus da ober voel,
Sevel amân eur zantinek,
Hac a vo grêt en form eun ti,
Evit respont an dreminidi.
Ha c'houi, va mignon qèz,
Mar oc'h eus marc'hadourcz
Pe da brena, pe da voerza,
Partiit buan gañte da guenta,
Evit Montroulez pe Gastel,
Hac bo po profit ne vo qet pell ;
Eyo e qafot honestamaut
Peadra evit hoc'h arc'hant.

G. C'houi a zo er philosophi,

A zo grêt ganêc'h ho studi,
 Hac a zo impossabl déc'h manqout ;
 Mes me zo ignorant, ne our netra en tout ;
 Nemèd debri va yôd ha lipouzat va léz ,
 Dêbri cals patates , ha hep sadorn crampoez ,
 D'ar zul vintin stripou , da gréis-de va souben ;
 Mes en eur gonta déc'h darn eus va zalanchou ,
 Ne sonjân qet penos sc'h ancouan va rimou.

R. Me voa bet en ur variqen ,

A voa talet en he daou ben ,

Ha pa' zortiis eus ac'hane ,

Na nao vouien qet na comz , na bale .

G. Debonjour déc'h , tud a hénor , pñi

Zo deut a galon vad da guichennic ho ti ,

Gant eur joa vrâs d'o saludi bremàn ;

A greis calon ni so deut amàn .

Saludi reomp ractak ho personach ,

Gant ar respet a gommard ho pizach ;

Hac entretant oc'h oll gompagninez ,

Rac sur tud vrao oc'h amàn assambles .

R. Pa ho quelân ger coantle rassamblet ,

Qer propr , ger brao evel ma zoc'h guisqet ;

E sonjân din e ve un eured ve

An nombr a dud a so en oc'h assamble .

G. Me-fot din bremàn va mignon ,

Gout eus a betra eo qestion ,

Rac ma velân ur seurt banden

Eru da doul va dor d'amî surpren .

R. N'en deo qet evit ho surpren ,

Nac evit ober poan da zen .

E zomp amân en em assamblet

Evel ma ve ur yanden dénved .

Ni a zo o clasq da eureuji ,

Ha na ellet qet da ziferi ,

Dindan boan da bêa an amand ,

Hac ar misou antieramant,
 Un ouades am hoa tennet,
 Hervez ma zeo deomp rapportet,
 Disqennet e zeo en ho ti,
 Rac-se rentit-y deomp-ni :
 C'holi a renq renta deomp rôson
 Anezi, va mignon.

G. Pa ho clêvân, va mignon, a gress
 E sav va blêo abars em penn
 Pa gomxit din eus a ouidi,
 Rac en ti-mân n'en deus hini.
 Evit ezec'h, gragez ha merc'het,
 Ar re se lavarâñ qet;
 Mes abars m'o po ens an ti-ma eur plac'h,
 C'houi a renqfe e goulen yac'h.

R. Ni zo e clasq eur plac'h yaouanq,
 Mar qirit ni e hanvo dêc'h franchamant :
 He hano eo *Guillemet ar Maout*,
 Nac evit heza pried da *Charlez ar Zaout*.
 Da zont d'an ilis da eureuji,
 Evit echui an demezi.

Guillemet ne vouie qet
 E voa heryo deiz he eured,
 Hac a zo êt d'ar vêlin da oza qerc'h :
 Rac se, redit, mar qirit, var he lerc'h,
 Rac ar meliner a voar parlant
 Hac a ambus ar merc'het yaouanq.
 Aon a meus na rancac'h reir he gortos ;
 Abars mac'h êrno e vo noz.

G. M'am be ar bermision
 Da antren en ho ti, va mignon,
 Me larve prompt, hep diferi,
 E penn ho tol va c'hevredi.
 Pa voan êgn e penn ar c'harz
 Me e hanavas eus he c'hoars ;

Hac he c'hlévis 6 lavaret :

Eru eo davidon va muyàn caret.

R. P'on eus ho quelet o tont da dal va zì,
E sonje din e voach eur vanden merdai
O vont da Vrest evit enii amharqamant,
Pe soudardet o clasq o lojamant;
Pe otramat eur vanden stoupéryen
Eus a Scrignac, Lorcqfret pe Berryen.

G. Si clamabòr et meditabor ut columba.

Evelse e comzàn, pa ven o latina.

En han Doue, n'on daleit qet,
Rac ar sacrist à so guel bresset;
Me zonch din eo eus a úrz Sànt Cripin,
Hac e car dijuni mintin.

R. Qer brao, qer coant oc'h eus comzet,
Va mignon qèr, ho refuzi n'illap'net :
Me a ya da ober eun dro dre va zì
Da chout a me gavo déch' ho qev
Ha pa rin-me eun dro var va seur,
E teuyo un dra benac d'am heul,

G. Setù amàn ur vaouës coant,
Ha ne d'eo na còz na yaquaq,
A dle ravissa ho spere
Gant he fresanç hac e guenet.

R. Ar vaouës se sospere'hennet,
Emedi al liou var e beg
Hac he deus bet chouzetz he far,
Ha na ra fors piou zo var vár.
Me a gred he deus dija poazet
Eus an darbot he biziet :
Qassit-hi ganeoc'h var e c'his
Rac aon ne dese droug-avis.

G. Terrapl meurbet oc'h difficil ;
Va mignon, ho complimanchou zo civil,

R. Setù amàn eur plac'h yaquaq,

Hac he deus ur galon ardant
 Hac a dle plijout d'ho fantazi,
 Pe oc'h dies da gontantri.

G. Ni on eus-y diguemeret,
 Ha neo qet da veza refuset;
 Pa vo êru an heur, mar car,
 Ni so prest da choas dei he far.
 Mes un all a c'houlenomp c'hoas,
 Hac a so blesset en he scoas,
 He zervicher qercoulz hac hi;
 Eru eo ar poent da repari.

R. O presanti déch'an objet
 Pini oc'h eus dija goulennet,
 Ouspenn, ni a c'houlen pardon,
 Mar hon eus bet division.

Didostait-ta, den a zevez,
 Da ziguemieret ho mestres;
 Ni he ro déch'a galon vad,
 Gant conje he mam hac he zad;
 Conje he c'herent hac he lignez,
 Da antren ganêch'e priedelez.

Pedit Jesus, Roue an Tron,
 Da rei déch'e venediction,
 Ha doc'h asista evel ma eure
 En eured Cana en Galilee.

Cunduit eur vuez vat,
 E doujanç Doue, erve ho stad,
 Ha goude monet da repos,
 Gant an æles er barados.

COMPLIMANT TOL.

M'o supli, compagnuez, da bresta ho silanc,
 Evit ma parlantin bremàn en ho presanç.

Gant honor d'ho yec'het me à deu da eva,
 Hac a beurs ar Vreg-Yaouanq en ho trugarecàñ.
 P'o c'heus bet ar vadelez d'he beza asistet
 En devez á hirie ebars en he heuret.
 Hac evit oe'h oblijia ec'b evin davantach.
 Da yec'het nep so roet gant Doue dei evit partach.
 D'ho yec'het, Greg-Yaouanq, eus a beurs ho pried ;
 Doue a rei dêch ar c'hraç d'en em garout parset,
 Ha da rei dêch er bed-mà qement a souhetet :
 Me a reget ma yezo oc'h oll desiriou exocet.
 Me a reget dêch c'hoaz asistanç un Doue,
 Evel guechal en eured Cana en Galilee.
 Me a ev d'o yec'het oll eus a greis va c'halon,
 Doue da rei deomp oll e venedietion.

Ne ancouaomp qet ive an anaon decedet,
 Tad, mam, ha breur, ha c'hoar, éont, woerebezet,
 P'o devoa bet ar soign, qentre ma voant en bue
 Da zovetat da hepini ac'hanomp e zanve.

Chomit, compagnuez, pepini en e-blac,
 Evit caout ar vadelez da asista er graç.
 P'on eus dekret hac evet, trugarecaomp Doue
 Da veza roet deomp-ni ouz hon nécessite.
 Excus-ta, Compagnuez a c'houennàñ bémàn,
 Rac aon n'am be qet plijet da speret peb-unan.
 Couscoude e cred din ne meus laret netra.
 Hac a choqfe nicun a-guement so amâ.
 Me a ese d'ho yec'het oll eus a greis va c'halon,
 Ous ho pedi da zébri ha da eva en ho tiſcretion.
 Chomit ta pepini, qeit m'o e volonté,
 Me n'on qet deut amân da rei da zen e gonje.
 Graç deomp oll da vea bepret en joausdet,
 Doue da gonservo qement so eus va c'hièvet ;
 Done d'or c'honservo amân var-an douar :
 Graç deomp d'en em velet un devez bars er gloar.

Discours evit un Eured.

Salud déch', Compagnunez, gant guir humilité,
 Pa meus bet an hardisson da zont en ho pote.
 Perac tra n'am boa bet eloqanc Ciceron,
 P'otramant ar furnez en devoa Salomon !
 Perac n'enj boa-mie bet guinou ha teod alaouret,
 Da barkant en ho presanç evel ma veritet !
 Me zo deut amâ hirie gant va l'hompaghunez,
 Evit goulen ouzoc'h, mar he ho madelez,
 Eur recit mad benac ouz an dejz a hirie :
 Choui oc'h-unau a ell accordi din qementse.
 Tennet hor boam d'ar sort da clasq ar savanta,
 Allas ! ma zeo digoezet gant an ignoranta :
 Mes dre ho madelez, ho sqiant, ho prudanç,
 M'ho ped d'am excusi demeus va ignoranc.
 Me c'hoare ganén hirie vel gant ar stereden,
 Pa deu an eol da bara a goll he sclérijen ;
 Zo n'em gavet amian'evel en 'ir jardin
 Guernisset a lore, a roz, a durcatin,
 Hac en e greis a zo bet maguet ur fenielen
 Brillantoc'h e-unan eguef ar gaera fleuren.
 Me gare dont a henn da allout he surpren ;
 Va speret zo tronblet, n'on qet evit compren.
 Gant henor e saludan an oll gompagnunez ;
 Peoc'h Doue d'ar re veo, d'an anaon silvidiguez.

Bremâ ec'h antre da vit ar Plach.

Salud, Plach'-Yaouanq, demeus a bera Doue,
 Me zo deut d'o cavet en deves a hirie,
 Evit gout deganeoc'h a chout zo presantez
 Da zont da efectui ar pez so prometez.
 Deut da q'houel bennos eus he tad bac ho miam,
 Evit dre gement-se bera dirao Doue divlan ;
 Rac. des a Chour'hemen en eus demp ordenez
 Respecti ducist peb-unan nep o deus hor maguet.

Pa éruer oas an

Rac-se , Compagninez , mar deuhan d'oc'h aréti ,
 Bezit ar vadelez da zont d'am excusi .
 Stouomp ta d'an daoulin da c'houlen ooz Doue .
 Ma teuy d'on asista en devez a hirie .

Bremd e taouliner.

Doue oll-buissant en ên vel en douar ,
 M'am eus oc'h offancet , me meus ur guir glac'har ;
 Cetü me d'an douar dirazoc'h prosternet ,
 Ma vo ho madelez accordi dñs ur reget .
 Ho pennos , va Douel eus ar pez a e'houleñnen ,
 Evet ho Servicherez so daoulined amàn ,
 Evel guechal Sant Yan , pa vadezas hor Zalver ,
 A glèvas en êr ur vœz abeurs an Tad Eternel :
 « Hennes e zeo va mab an hini myya carcf ,
 « Va c'hraç ha ya bennos a vo gaufan bepref .

Bremá e sao hac e tistro eus ar guerent.

Goude beza goulemet benediction Doue ,
 E false caout brema hini he zad ive ;
 Cetu ho merc'h d'an douar dirazoc'h prosternet ,
 O renta deoc'h-u homach , evet ma zeo illeet ;
 Goude bennos ar Vers'hez , avec mont eus an ti ,
 E c'heulen a vouir galon diganec'h hoc'h hini ,
 Or ta , deut eta a vouir galon ,
 Da rêu gant ho puguel ho penediction .

Exit ar Vras.

Ha c'houi , mam garnatezus , pini deus he magnet ,
 Ur mennat e c'houleñnen , n'am résusat qet ,
 Ho pennos a c'houlan ganeoc'h vit Ro puguel ,
 Evel mac'h eure guechal ar Patriarchet sancti .
 Bennos brendeür ha c'hoareuet ire parallament ,
 Hini paeron , maerones , ma maint anan presant ,
 Hini ar zent , an æles , hac hini ar compaginiez ,
 O deus gret dei an henot d'e asista en he dovez .

Ha bremàn demp en hano Zoue ;
Goude renta an homach, oblijet omp da ze.

*Bremâ e vê lavaret ur Bater , un Avê hac un
De profundis , hac e saver er za.*

Savit ta , Merc'h Yaouauq , da zont da di Done ,
Evit efectui en antier ho promesse ,
Da gaout fidelite bete fin ho pue ,
Ha goude d'en em velet en barados Doue.

DISCOURS.

Pa roer ur Plac'h , hac evit échui tout.

QEMERIT , va mignon , courach ,
Eru oc'h en fin ho peach ;
Ne c'houlennâ mui a dermen ,
Echu eo va zrajedien ;
Poent eo dêc'h certen , va mignon ,
Caout un tam consolation .
Didostait amân d'an treujou ,
Ha me roy deoc'h ur c'hêlou
Peini a gredâncertenanant
A rejouisso ho santimant ;
N'en d'eo qet ur c'hêlou epqen ,
Rac cetu amân ur femelen ,
Pehini a lavarac'h , va mignon ,
A voa prometet d'ho calon ;
Cetu amân ur femelen ,
A zo caeroc'h eguet ur chinosen ,
Roz , na fourdikis , na levant ;
Speret an oll a rent contant .
Ei lec'h ma ve tevalijen ,
He laqa pep seurt sclérijen :
Caer eo evel ur stereden ,
Qer caer hac ar verelaouen .
He guenet hac he mòdesti

A dle certen dont d'ho charni.
 N'ho pezo ganti nep disput certen ,
 Nemiet en effet en guir Gristen.
 Didostait eta , va mignon ,
 Goneet oc'h eus ho proces en pep **fécon** ,
 Rac bremàn e vet exantet ,
 Hac e ve qestion da denna d'ar billet ;
 Rac cetu amàn an objet
 Leun a garantez hac a speret ,
 Pehini a bresantàn deoc'h evit ho **compagniez**
 Nonpas evit beza tretet en esclaves ;
 Rac gout a rit a dra certen
 E zeus bet estre evidoc'h eus he goulén .
 Rac aze eus daou pe dri ,
 O deus bet o bissac'h diganti.
 Rac-se pa zoc'h preferet
 Da guement en deus-hi goulennet
 Va miguon me ho supli ,
 Na denuit qet d'he goal-dréti ,
 D'he dilezel en he c'hlènvet ,
 Qeneubeut hac en he yec'hed ,
 D'he chasseal ermès an ti ,
 Evel pa ne hanavesfac'h qet anezi :
 Ma vouifen se , va mignon ,
 Ne deufsen qet a vouir galon
 Da réy he born deo deoc'h bremàn
 D'he c'has ermès eus an ti-màn ;
 Pe mar er grit , clèvit ur guer ;
 Dioüallit eus ar goalinier
 Eus a zorn Doue oll-buissant ,
 Da bunissa an dud vechant :
 Me a lavar ar goalinier
 Eus e furor hac e golear ,
 Da lavarat eo , ar c'holloù ,
 Ha calz demeus a valeuriou ,

Perc a aller da evita
 O veva gant grac Doue er bed-ma,
 Rac Sant Bernard a lavar ; n'eus qet e di
 Na zant coulz pe goulz ar voalen a gastis,
 Mes mar bevit en doujanç Doue,
 Ho pezo pep seurt prosperite.
 Peguemment benac hep douetanç
 Ec'h ouzoc'h qement-se en avanç,
 Gant ho permission me lavaro
 En ber iestant ur gair pe zaou :
 Qemesqet eo buez an den
 Bepret gant joa ha gant angen,
 An eil a deu goude eguile,
 Evel ar mòr pa deut ar mare,
 An dud demezet zo ul lest,
 Exposet da bep seurt tempest,
 Var ar mòr o vagal,
 Exposet da bep seurt glac'har.
 Gouscoude e seblant d'ar yaouanqis
 Beza quer caer hac ar fourdili.
 Mes, alias ! en em drompla a mont,
 Ur boquet spern guen a gavont.
 Evit supporti an infirmité
 A alfe caout an eil hac eguale,
 Ret eo deoc'h beva en guir union,
 Ha Doue a roy deoc'h e venediction.
 Peb den zo gant Doue choazet
 Evit beza eurus ha salvet.
 Hoguen ret eo goude goulou
 Beva just en guir Gristou.
 Contemplit ar societe
 A so entre an douar hac an en
 Gouleennit bepret digant Doue
 Courach ha nerz d'ho liberte,
 Evit ober un dra barset,

Da renta ar pez a recevet :
 Sonjit e zoc'h pelerinet ,
 Da drafica e zoc'h digasset ;
 Retorn a ranqit adare
 Da renta cont da un Doue.
 Gout a rit , na zouetan qet ,
 Noc'h eus un adversour er bed
 An adversour-se eo Satan ,
 Siemp leomp oll quitibunan !
 Pa vezoz d'an drouc-speret
 Dont da dreubachi ho speret ,
 Respondit : *Abrenantio* ,
 Ha laverit : sinet eo ,
 An Alkrou-Dode eo ar brassa :
 Henor ha gloar rentomp deza .
 N'en deo qet plijadur am zouter ,
 Comz Doue eo hac e Lezen ;
 Respondit : *Abrenantio* ,
 Da guement pochet ho tento ,
 Meit goude bezalabouret ,
 Pa yec'h uerz hac ho yec'hiet ,
 Pa c'heleddiar an douar ,
 E rezplet ur gurunen er gloar .
 Me a c'houan ouzoc'h pardon bremàn
 Mar d'oc'h choget gant ar c'homzou-màn .
 Cetu an eil gant eguile ,
 Evit gloar Doue ha silvidiguez o ene .
 Me souhet dê oll graçou Doue ,
 Hac a bep seurt prosperite :
 Labourat en gloar Doue er bed-ia deiz ha nos
 Evit , goude o maro , monet d'ar Barados .
 Lavaret en eus Ciceron ,
 Mar bevit atao en union ,
 E vezot goude curunet
 En Rouantelez an Drindet .

Ouspen , er goalen a cured
 E zeo ar garante comprenet ;
 Dre ma zeo rond ar voalen ,
 Ne all finissa birviqen.
 Eur garantez evel honnes
 Ne all qet finissa james.
 Credi a rân oc'h eus pedet
 Jesus hac e Vam biniguet
 Da asista en oc'h euret ,
 En eured Cana , en Galilee ,
 Ec'h asistas e Vam hac én ,
 Demp-ni bremàn , Compagninez ,
 Da offr hor beden assambles
 Er sacrific an oseren ,
 Da c'houlen grâcou souveren ;
 Hac evidomp hac evite ,
 Gouleñnomp grâcou ouz Doue ,
 Erfin , o tont da finissa ,
 Dalit he dorn , croquit enna
 Prometit dezi fidehite ,
 Hac hi a brometo déch' ive
 Cetu aze he dorn deo ,
 Doue dre e c'hraç d'o cunduo.

FIN.

